

142

AR PAREOUR

gwechall

Ma zad 'n-eus bremañ daou vloaz ha pevar ugent .Forz a draou en-eus gwelet doug e vuhez . A devez all e oa troet ar gaoz war kleñvejou gwechall .

Pa'm-oa pemzeg vloaz oa deut e ma breh dehou eunheskedenn .

Kaer 'm-oa louzaoui anezi, ne baree ket mod ebed . Dizeha ree a-wechou mez pa yee an drouskenn seh kuit, e teue eun all atao dindan .

Dao oa mond da gaoud an apotiker, rag neuze ne veze ket galvet ar medisin ken pa vezed war bouez mervel.

Mez louzou an apotiker ree muioh droug evid mad. An drouskenn a hlaze an dro adarre hag ouspenn-se a greske tammig ha tammig .

Merh Golaig a guzulias din mond da gaoud he zad , eur pareour dispar war ar seurt kleñvejou-se . Ha me kuit da di Kolaig.

—" Troñs da vanch, ma niz " a lavaras din ar pareour .

Neuze 'n-oa greet teir dro gand e viz liper tro-dro an drouskenn hag eur groaz war horre . Teir boufadenn warni en-oa greet goude hag erfin en-oa dibunet ar homzou-mañ " AR VERB en-eus nao marh ,deuz nao e teu da eiz , deuz eiz da seiz , deus seiz da c'hweh , euz c'hweh da bemp, deuz pemp da bevar , deuz pevar da dri, deuz tri da zaou , deuz daou da eun, deuz eun da gour , torret e benn ha kuezet er mor" .

Ha bremañ, ma niz ,te yee an noz-mañ da gousked e-kreiz ar hoad-pin, ha te ne ziskoachi ket a-raog 'to klevet ar hog kenta e kana . Arabad dit dizoñjal .

Greet 'm-oa evel-se . Teir gwech on bet e weled Kolaig .

Pareet eo bet an heskedenn . Penaoz e ree e daol, n'ouzon ket , mez kal tud a yee da weled anezañ . Aliez e teue a-benn da barea aneze.

Marcel DIVANNAH .

Notenn : Aliez e Groñvel ez eer da weled seurt "pareourien" :
"Derboristed" a vez greet anezo , euz ar galleg "herboriste" sur
a-walh. Parea a reont dreist-oll an "derbod", da lavared eo an
daroued a daper gand ar zaout . Trei a ra an derborist e viz -
liper tro-dro d'an derbod, o lavared traou 'zo, med n'eus ket
tu da houzoud pezh a zibun . Eur sekred eo sur evitañ , ha
ne gredan ket e vefe eur stêr resiz gand an traou-se.

Eur plah koz deuz ar vro he-doa tapet eur zona war he gov
a-bez, ha laret e oa bet gand eun derborist d'he gwaz , skuill
bleud ed-tu warni, penn-kil ha troad ! Ha greet e oe, med ne
bareas ket .

Derbod : tro-war-dro Kallag. e talv ar ger-se kemend ha tam
mou plajou, boleannou hag all , a vez implijet gandar vugale evid
c'hoari.

vmvmvmvmv
mvmvmvmvm